

D'an 12 a viz Ebrel

- E 352, e Roma, **sant Julius I^{añ}**, pab.

Difenn a reas reizhkredenn ar feiz tra ma c'hwiste an Ariaded hag e harpas sant Atanaz.

- Er IV^{re} kantved, e kêr-vBraga e Portugal, merzherenti **sant Viktor**.

Hag eñ katekizad c'hoazh, e nac'has azeuliñ an idolennoù difiñv hag ne dermas ket da embann e feiz en Aotrou Krist, mab an Doue bev. Goude bezañ diwasket kalz a boanioù e voe dibennet o tellezout dre-se bezañ badezet en e wad.

- E 380, da vare Juluan an Dianzavour, merzherenti **sant Zenon Verona**, eskob ha feizvonnour.

Hag eñ ganet en Afrika an Hanternoz e teuas e Verona e Bro-Venezia lec'h ma vadezas kalz a baganed ha ma lakaas kalz a ariaded da zitreiñ d'ar feiz gwirion. Mignon ar baourentez ez ae da besketañ evit gounit e voued eñ e-unan.

- E 742, e Pikardia, **sant Erkembod**, eskob ha feizvonnour.

Hag eñ manac'h iwerzhonat e voe anvet abad Sant-Bertin hag eskob Tervana (Gl. Théroüanne), ar pevare goude sant Omer. Redek a reas e eskobiezh bras meurbet eus ar penn d'egile gant gred un abostol hag evezhiek dalc'hmat ouzh ar beorion.

- En Iwerzhon, e 793, **sant Killin**, manac'h.

- En Iwerzhon, **sant Evin**, eskob.

D'an 13 a viz Ebrel

- E 586, e Tarragona e Bro-Spagn, merzherenti **sant Hermenegild**.

Hag eñ mab ar roue ariat Leovigild e voe gounezet d'ar feiz katolik gant sant Leandr ha ne blegas ket rak gradoù-mat ha gourdrouzoù e dad keit ma voe tennet e hêrezh digantañ ha toulbac'het. Da-geñver Pask, dre ma nac'has reseviñ ar gomunion eus daouarn un eskob ariat e vo lazhet gant un taol vouc'hal war urzh e dad.

- E 655, e Krimea, merzherenti **sant Varzhin I^{añ}**, pab.

En em glevet e oa gant Uheldadoù Aleksandria ha Kêrgustentin evit difenn ar feiz reizhkred a-enep an unyouladegezh a veze harpet gant an impalaer Kustentin II. Abalamour da se e voe harzet ha kondaonet d'ar marv, hogen gouzizet e voe ar c'hastiz gant an harlu e Bro-gKrimea lec'h ma varvas.

- E 1945, e Palagano e rannbarzh Modena, **ar gwenvidig Rolando Rivi**, kloareg, merzheriet d'e 14 bloaz.

Ganet eo d'ar 7 a viz Genver 1931 e Castellarano en un tiegezh kouerion e oa ur paotr bliv ha speredek. E 1942 ez eas d'ar c'hloerdi hag e wiskas ar soutanenn. Pa voe ac'hubet ar c'hloerdi gant ar soudarded alaman e tistroas da di e dud hag e kendalc'has gant e studioù dindan renerezh person ar barrez. Dre berzh e garantez evit ar C'Hrist e sachas davetañ yaouankizoù ar vro. Skrapet gant ur strollad komunourion e voe jahinet e-pad tri devezh ha lazhet gant daou voled, er penn hag ar galon, goude bezañ embannet e feiz er C'Hrist hag e fiziañs en e drugarez.

- E Kembre, e 1124, **sant Karadeg**, beleg penitiour e Penvro.

Telennour e oa e lez ar roue Rhys pa voe tamallet e gaou. Neuze e reas e soñj kuitaat ar bed evit servijout Doue. Mervel a reas e manati Sant-Isvael.

- En Iwerzhon, e 656, **sant Meguñveg pe Kuñvin** (Iw. Mochaomhog pe Caohín), abad.

- E Bro-Skos, war-dro 838, **sant Gwinnog**, eskob, a vez graet eñvor anezhañ en eskobiezh Obar Dheathain (Aberdeen).

Kuzulier ar roue Kenneth en dije e harpet dre e bedennoù evit kemer an trec'h war ar Bikted o ren seizh emgann d'an hevelep deiz.

- E Breizh, er XVII^{vet} kantved, **ar bac'hiadez Mamm Frañseza a Sant Jozef**, leanez, diazevourez Kouent ar C'halvar e Montroulez.

Dimezet d'ur paramantour pinvidik eus Montroulez e echuas he buhez e-touez Beneadezed ar C'Halvar he doa lakaet da zont.

D'ar 14 a viz Ebrel

- Er I^{añ} kantved, **sant Aristarque**, keneil sant Paol. Genidik eus Tesalonikê e heulias an Abostol war un dro gant sant Pudens ha sant Trofim (Kv. 2 Tm 4, 20-21).

- En III^{de} kantved, e Roma, merzherenti **ar sent Maksen, Tiburs ha Valerian**.

- Er IV^{re} kantved, er Sav-Heol, merzherenti **sant Ardelion**.

Dremmour e oa hag e voe gounezet d'ar feiz p'edo o luadenniñ ar misterioù kristen. Disklêriañ a reas e feiz dirak an arvestourion a c'houlennas e varv hag a zeuas a-benn d'e lakaat da vervel war ur geuneudeg.

- War-dro 688, **sant Lamberzh a Lugdunon (Lyon)**, feizvonnour hag eskob.

Uhelgargad e oa e lez ar roue gall Klotar III pa zivizas mont da vanac'h en abati Fontenelle diazezet gant sant Wandrilh. Diuzet e voe da abad war e lerc'h. War c'houlenn sant Pasker eskob Naoned e lezas sant Ervelen ha daouzek manac'h da vont da ziazezañ ur manati war enezenn Indr. Anvet e voe eskob Lugdunon goude marv sant Genes.

- E 1117, distro da Zoue ene **sant Bernez a dTiron**, abad.

Ganet e Abbeville ha da gentañ manac'h e Sant-Kiprian e Pictavia (Poitiers) ez eas da benitiour a-raok diazezañ abati an Dreinded Santel e Tiron er Perche. Evel Roperzh Ervrezhel war harzoù Breizh, Raoul ar Fusteg e Breizh, Pêr ar Steredenn er Berri, Vital a vMortain e Normandia, pe c'hoazh Adelin a Etival (Gl. Alleaume), e voe unan eus tudennoù pennañ lusk manac'hel an XI^{vet} kantved.

- E 1184, **sant Benezed**, bugul en Avignon, marvet d'e 19 vloaz. Lakaat a reas da sevel ar pont war ar Ron.

- En Iwerzhon, er V^{vet} kantved, **sant Tasach**, eskob, diskibl sant Padrig.

D'ar 15 a viz Ebrel

- Er bloaz a c'hras 64, e Roma, merzherenti **ar santezed Anastazia ha Basilisa**.

Kondaonet d'ar marv, hervez an hengoun, dre m'o doa sebeliet sant Pêr ha sant Paol, e voent jahinet kriz dindan urzh an impaler Neron.

- E Breizh, war-dro 448, distro da Zoue ene **sant Padern I^{añ}**, eskob kentañ Gwened, unan eus seizh sant diazezour Breizh.

Dibabet e vije bet gant gant Konan Meriadeg e 386 evit gouarn eskobiezh nevez Gwened a oa stag betek-hen ouzh ouzh sez Naoned bet diazezet gant sant Klaer.

- E Gwened, **sant Padern II**, eskob Gwened.

Urzhiet e voe gant sant Perpetu da-geñver ar senez bet dalc'het e Gwened e 465 o vodañ eskibion rannbarzh Teurn. Darempredoù mat en devoe Padern II gant Karadog a oa e penn Brezhoned Bro-Wened: roet en dije e balez d'an eskob evit sevel an iliz-veur. Padern, gant sant Maelan Roazhon, a gemeras perzh e kevraouerezh feur emglev 497 gant Klodwig, roue ar Franked. Evit a sell ouzh an Arvorig e voe diferet tiriad ar Vrezhoned ; ganedigezh Breizh Nevez e voe eta. Kemmesket eo buhez eskob gwened gant buhez sant Padarn, diazezour Llanbadarn Fawr e Kembre, ha gant buhez sant Padern Avranches hag a zo liammet gant istor Breizh. Pedet e vez sant Padern e-doug koulzadoù a sec'hor hag evit kaout amzer vat evit al labour-douar. D'an 21 a viz Mae e lider treuzlec'h e relegoù.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **santez Juveod**, c'hoar sant Maodez, penitiourez en Henwig e Bro-Leon.

- **Deiz-ha-bloaz santeladur sant Gwilherm** e 1247, eskob Sant-Brieg, a zo e ouel d'an 29 a viz Gouere.

- E Bro-Skos, e 962, **sant Mund pe Mond**, abad.

Sevel a reas meur a vanati en enez Iona hag e korn-bro Argyll e Bro-Skos.

- En Iwerzhon, er VI^{vet} kantved, **sant Ruan**, abad e Tiobraid Árann.

D'ar 16 a viz Ebrel

- En III^{de}-IV^{re} kantved, **sant Leonid** hag e seizh keneilez, **ar santezed Karisa, Galina, Teodora, Nika, Nunekia, Kalliz ha Basilisa**, merzherion e Korintoz.

Dre ma voent kavet o pediñ en un iliz da zeiz ar Pask e voent jahinet ha lakaet da bignat en ur vag, ur maen staget ouzh o c'houzoug, o daouarn staget en o c'hein ha taolet er mor.

- E 565, distro da Zoue ene **sant Patern** (Gl Pair), eskob Avrinka (Avranches).

Hag eñ genidik eus Piktavia (Poitiers) e voe da gentañ manac'h e manati Encion hiziv e Saint-Jouin-de-Marnes a-gevret gant sant Skubilhon. En em dennañ a rejont o-daou e bro-Avrinka, e koadeg Scessiacum pe Quokelunde, dindan renerezh an abad sant Generous. Patern a voe urzhiet beleg gant sant Leontien, eskob Kosedia (Coutances). Hervez lod e voe galvet gant sant Maelan da gemer penn an abati nevez savet gantañ e Roazhon. Diuzet e voe da eskob Avrinka pa oa dek vloaz ha tri-ugent, hag eno e kenlabouras gant sant Areast, sant Gaod ha sant Senier. Mervel a reas trizek vloaz goude, p'edo o vont da vanati Scicy lec'h ma voe sebeliet. E Vita a voe skrivet gant Venañs Fortunat.

- **Sant Skubilhon**, keneil sant Patern a Avrinka, a vevas gantañ e manati Encion, a varvas d'an hevelep deiz hag e vignon pe, hervez lod, 10 vloaz war-lerc'h.

- E 1783, e Roma, **sant Benead-Jozef Labre**, pirc'hirin.

Hag eñ ganet e Ameth en eskopti Boulogne, ne zeuas ket a-benn d'en em ober ouzh hini ebet eus doareoù ar vuhez relijiel reoliek eus e amzer. Bevañ a reas evel ur pirc'hirin, emzilezet e Ragevezh Doue hag o pediñ dalc'hmat. Mervel a reas e dibenn ur birc'hirinadenn a reas betek Roma.

- E Bro-Skos, e 1115, **sant Magnus a Orkney**, merzher, patrom an inizi Erc'h (Orkad) ha Shetland. Mab ur vikingat, priñs an inizi Orkad, e voe da gentañ morlaer a-raok dont da vezañ kristen. Neuze e renas ur vuhez a benitiour war an aod. Anvet war ar gador-veur goude e lodennas ar galloud gant e genderv Hakon. Hemañ avat a dapas krog ennañ hag e lazhas en un iliz. Emañ e relegoù en iliz-veur Kirkwall.

D'ar 17 a viz Ebrel

- Er VII^{vet} kantved, en Hannonia, **sant Landri** (Gl Landry), mab santez Waltrud ha sant Visant Madelgair, breur sant Dentelin, sant Adeltrud ha sant Matelbert.

Manac'h e oa pa voe anvet eskob Melda (Meaux), hogen e tilezas e garg evit mont da vanati Hautmont a c'houarnas war un dro gant abati Soignies a oa bet diazezet gant e dad.

- E 1680, e Sault e Bro-Gebeg, **santez Kateri Tekakwitha**, gwerc'hez.

Ganet en ur meuriad indian e voe badezet da zeiz Pask hag e ouestlas da Zoue he gwerc'hded daoust d'an eneberezh a savas enep dezhi.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Even**, beleg ha merzher.

- E hanternoz enezenn Vreizh, e 614, **sant Donnan**, manac'h ha merzher en Hebridez.

Diskibl sant Koulmkell en enez Iona e oa. Merzheriet e voe dre an tan pe ar c'hleze gant Normaned war un dro gant e 52 geneil p'edont o lidañ gouelioù Pask.

D'an 18 a viz Ebrel

- War-dro 526, merzherenti **sant Euzeb**, eskob ha merzher.

Hag eñ eskob Fanno e Bro-vMarke en Italia, ez ambrougas ar pab sant Yann I^{añ} betek Kêrgustentin ha war an distro, war un dro gantañ, e voe harzet ha bac'het war urzh Teodorig, e Ravenna lec'h ma varvas.

- E 850, merzherenti **sant Perfecto a gKordoba**, manac'h ha merzher.

Dre m'en doa pismiget doazhadur Mahomed ha gourbannet e feiz er C'Hrist Mab Doue e voe bac'het gant ar Vaored ha lazhet dre ar c'hleze.

- E 1618, **ar wenvidigez Mari an Enkorfidigezh**, karmeziadez.

Anavezetoc'h dre he anv boutin a Itron Acarie e labouras evit diazezañ e Bro-C'hall karmeziou adreizhet. Pa voe intañvezet e wiskas ar ouel e hini Pontoise a veze renet gant ur verc'h dezhi.

- E Breizh, er VI^{vet} kantved, **sant Kedverin**, eskob, diskibl ha lerc'hiader sant Paol Aorelian.

- E Bro-Saoz, er VII^{vet} kantved, **sant Moly**, iwerzhonat pe skosat, kelenner sant Aedhelm, eskob Shibern, diazeour abati Malmesbury (Caerfeldu).

- En Iwerzhon, e 639, **sant Lazrian pe Lammliz**, lesanvet Molaiz (Gl Lazérian), diskibl sant Finnian a gClúain Ioráird, abad Leth-glenn.



KATERI TEKAKWITHA